

# SOUNE AR BOESOUN

1

Klevome toute kana er zoun vrao  
 Var gemint hini a vez mezo  
 Evit ma klevo pep hini  
 Ar vrionez eb damant di

2

Gouscoudez me a c'hoar er vad  
 E meo outo er goal grogat  
 Pa' zint tut fur var o meno  
 An olle die kemer scouer diouto

3

Koz, yaouanque, paour, a pinvidic  
 Teruble ind dre nerz o banic  
 Ag an dut krefa guisieca  
 E no c'h enver-ne dint nentra

4

E nozac'h mezo a lavar  
 Er barez ma neus ket va far  
 E gesec e saout e mezan  
 Eo a re vela zo er vro man

5

En ostaleri e veo digemeret mad  
 Keit a ma pado e hialhat  
 Mes pa ne vo mui guenec ebet  
 Dastu er meas e veo taolet

6

Pas vez o c'heva audivi  
 Neus kear ebet par de hini  
 Labourad mad e zouarou  
 Geot keit ac hen e ne brajou

7

Hirio eo leun betec krevi  
 Var c'hoas nen deo tam da zribi  
 Gant ma kavo atao da eva  
 Ne ra ket foutre kaer emeza

8

Eur c'h ec zo troet da eva  
 E ne zi e vanco pep tra  
 E leac'h prena pep ac ollen  
 Va gagne a lipo e gueren

9

Ne zeus nentra ken divalo  
 Vid guelel er vavouez mezo  
 Rochet an azac'h zo guerzet  
 C'hoas e lavaro veo kolet

10

Sur tout pa gav mad audivi  
 Vez ket pel o kempen e zi  
 Kar guerza rafe a loudouren  
 E bragez kouls ag e losten

11

Guelel e vez ar yaouanquizou  
 Aliez e bars tout ar foiriou  
 O vonet e bars an ostaleri  
 A pa zortion e vez rus o fri

12

A pa vez poent da zont dar gear  
 Vez kolet ar paourqueaz paner  
 Setu penaos bars er fermiou  
 E vez kolet paner ar viou.



